



## RECIT

*Eus an darvoud meurbet horrubl digüezet e  
Montbouton, tost da Belford, en nosvez an 10  
d'an 11 eus a vis gouere diveza, 1844.*

Var ton : DEOMP-NI OLL BREMA.

**D**EUT oll da zelaou, me ho ped,  
Eun darvoud horrubl arruet  
Tost da Belford, e Montbouton,  
A ra spouroni ar galon,

Eur gorventen avel eñzus,  
Cuezet var templ santel Jesus,  
A vranl an ilis en antier,  
Hac a lanc an dòen en êr.

Neuze ezeo en em dolet  
Er pêvar c'horn eus ar vêret,  
Gant eur fulor eus ar vrassa,  
Hac eun drous eus ar spontussa.

An oll beziou zo difframmet,  
Ar c'horfou en êr zo stringet:  
Eun horrol vije heza test  
Demeus eur c'hen horrubl arvest.

Pa deuas an deiz da darza,  
Voa eur foul vrás eno dija.

— 8 —

Eur c'hi fors a leusqet dre oll ,  
O velet qen terrubl horrol.

Güelet a rêt a bep costez  
Corfou hac a voa en o fêz ,  
Memprou distag , ha relegou ,  
A scasse an oll galonou.

Autoriteou eus ar guær  
En em gavas en bêr amzer  
Er vêred , a voa disfontet ,  
Hac a rente an oll spontet.

Eus a bep tu voe digasset  
Gant soign hac ar brasa respect  
Relegou paour an dud maro  
Da veza entêret eno.

Anfin , gant soign ar gristenien  
Gouscoude e teujot a ben  
Da ellout dont da repari  
Dizurz horrubl an tempest cri.

Mes , daoust m'eo eno reparet  
Ha qempennet oll er vêred ,  
Atao e teuy sonch er memor  
Un arrest quer leun a horror.

Breizis oll , christenien güirion ,  
Pedomp Doue a greiz calon  
Na vezoo biжен hor brô test  
Demeus eur c'hen horrupl arrest.

FIN.

---

E Mentravez , eus a Imprimeri LÉDAN.